

# Gerioù ar vuhez

**RKB**

▶▶ Radio Kreiz Breizh

## KROC'HEN

### Kroc'hen

Orinoù ar ger kroc'hen a zo stag ouzh al latin corium, lêr.  
Kavet e vez e yezhoù keltiek all, croen e kembraeg ha  
craiceann e gouezeleg Iwerzhon.

**Kroc'hen an dud**

**Kroc'hen pato**

**Kroc'hen ar c'hoaven, pa vez tommet al laezh**

**Kroc'hen war an daoulagad (cataracte e galleg)**

**Diskroc'henañ, tennañ ar c'hroc'hen**

**Diskroc'henañ ul loen**

Evit fardañ lêr e vez soubet ar c'hroc'hen e-barzh kivij  
Kivij, meskaj plusk koad derv (tan e galleg)


**Kivijañ, ober lêr gant ar c'hroc'hen**

**Kivijer, un den a fard lêr**

« Ober kozh kroc'hen »,  
chom e-pad pell e-barzh ul lec'h  
« N'eo ket chomet d'ober kozh kroc'hen »,  
n'eo ket chomet e-pad pell

« Al louarn a varvo en e groc'hen »,  
n'eus ket voaien da cheñch un den

« Stag eo e groc'hen deus e gein »,  
evit un den tost, pizh



**Kroc'hen gwazi, pa sav blev  
war an divrec'h gant ar  
yenijenn, pe gant an aon**

**Kroc'henenn, tro-dro d'un dra  
bennak (membrane e galleg)**

**Kroc'henus, pa groga ur  
gloazadenn d'ober un tamm  
kroc'hen**

**Kroc'heneged, batrasianed,  
loened gant ur c'hroc'hen tev  
(evel an touseg hag ar sourd)**

**Kroc'hen-goz**

**Kroc'hen broc'h pe kroc'hen  
louz**

**Ur chupenn kroc'hen gavr**

### Da vont pelloc'h

« Ma zamm kroc'hen  
n'eo ket da werzhañ »,  
titl ur ganaouenn gant  
**Berne Tangi**  
war e bladenn  
**Lapous an tan**



COFINANÇÉ PAR  
UNION EUROPÉENNE  
UNANIEZH EUROPA



L'Europe s'engage  
en Bretagne / Avec le Fonds européens  
de développement régional